



KANTIK

DA

ZANT ROCH



TON : *Neb a gar beva fur ac euruz.*

Diskan :

Sant Roch, patron meurbed gallouduz
 Euz an dud klanv hag ankeniet,
 Pedit hor Zalver trugarezuz
 D'hor miret holl diouz peb klenvet.

1.

Diskennet euz eul lignez huel
 E rannit d'ar paour ho tanvez,
 Evit galloud beva ha mervel
 En dienez, er baourentez.

2.

Redek a rit da zicour kæriou
 Strafeuille holl gant ar vossen ;
 E peb karter e rit burzudou,
 E tennit an holl a anken.

3.

Soulaji a rit gant madelez
 Ar glanvourien gæz dilezet :
 Ho pedennou hag ho santelez
 E peb leac'h a voug ar c'hlenvet.

4.

Vit ho nessa c'houi offr ho pue ;
Kalz a zeu d'ho tigemeret
Evel eun æl deut a berz Doue
Da zouten an dud trubuillet.

5.

Brema c'hoas euz a lein an Envou,
Gant ar garantez ar vrassa,
He vougit kren e kalz a vroyou
Ar vossen hag ar c'holera.

6.

C'houi er goar, patron karantezuz,
Hor pec'hejou, hor goal vue
A denn varnomp klenvejou spontuz :
Grit ma tistroimp ouz Doue.

7.

Sant Roch, skouer euz an holl vertuziou,
Grit ma kuitaïmp ar pec'het,
Ha ma c'heullimp oll oc'h exemplou,
Vit beza en env kurunet.



IMPRIMATUR :

Corisopiti, die 3 Augusti 1896.

A. GADON, Vic. gen.